

AN DAOU EJEN

DISKAN :

Ma rankfen me o guerza
Gwell ve ganen ' n'em grouga !
Me gar Jannet va græg, neuz forz ! gwell ve ganen
E varfe hi eghet va daou ejen ! (1)

I

Em c'hraou me a meuz daou ejen
Daou ejen braz gwen-marellet ;
Ar vroud ' zo græt gant eur scour kelen
An alar gant dero kalet....
An douar gant o aradurez
Er goanv ' zo glaz en anv melen
Muioc'h a c'hounezont en eun dervez
' Vit n'o deuz koustet d'o ferc'hen.

DISKAN

II

Sellit outho al loened kaer
O c'harat doun dre ar rouden,
Eneb ar glao hag ar barr-amzer,
Ha pa ve tom ha pa ve ien !
Hag evit eva pa ehanan
E teu luzen deuz o froniou,
Ha dreist o c'herniel du e velan
O nijal al laboussigou.

DISKAN

III

Krenv int evel eur gwasker-aval,
Donv int evel denvedigou ;
Bep bloas e teuer deuz a Vro-C'hall
D'o marc'hata en or C'hæriou,
Evit ho c'hass da zeiz meurlarjez
Da Baris dirak ar Roue,
Pe ' vit ho guerza d'ar gigherez.
Ne fell ket d'in pa zint d'in-me !

DISKAN

IV

Ha pa deuiö va merc'h brassoc'hic,
Ma teu da vab ar Roue c'hoant
D'he c'hemeret evit priedic
Me roi ' d'ezhan va oll arc'hant !
Mæs mar goulen evit argoulou
Va daou ejen braz marellet
« Va merc'h dilezomp an henoriou
Ha d'ar gær gant hon ejennet ! »

DISKAN

(1) Setu aze eul labourer
A zo eun tam-mad a farser.